

# PARDON SANT ERWAN



## OFFEREN VREZHONEK

### KANTIK-ANTRE

DISKAN :

*Pa neo hirie ho Pardon, sant Ervoan vinniget,  
Pedet evit ho proiz, evit ar Vretoned :  
Hirie ann oll Vretoned ho ped galon vad :  
Reit d'e otro sant Ervoan, reit d'e oll ho mennad.*

Pa deu miz MÊ da vleuiian el liorzo ar vro,  
Miz MÊ, miz ma Mamm santel, pa deu miz MÊ enn dro,  
Me gleo, war zu Landreger, ar pemp kloc'h bras o son,  
Kleier Ervoan ha Tual o c'helvel d'ar Pardon.

M'ho kleo, otro sant Ervoan, ô ma Sant binniget :  
Bep'la me dei d'ho Pardon, keit ha m'allin kerzet ;  
Bep'la me dei d'ho Pardon, rak c'houi ma chileoo,  
Pan hoc'h Breton evel-d-on hag eur zant enn Envo.

## KYRIE-GLORIA AN AELEZ, E LATIN

5. Ky-ri- e \* e- lé- i- son.

Chri- ste e- lé- i- son.

Ky- ri- e e- lé- i- son.

Ky-ri- e \* \*\* e- lé- i- son.

Gloria in excelsis Deo,  
Et in terra pax hominibus bonæ voluntatis.

Laudamus te, benedicimus te, adoramus te,  
Glorificamus te, gratias agimus tibi propter magnam gloriam tuam,  
Domine Deus, Rex cælestis, Deus Pater omnipotens.

Domine Fili unigenite, Jesu Christe,  
Domine Deus, Agnus Dei, Filius Patris;  
Qui tollis peccata mundi, miserere nobis;  
Qui tollis peccata mundi, suscipe deprecationem nostram ;  
Qui sedes ad dexteram Patris, miserere nobis.

Quoniam tu solus sanctus,  
Tu solus Dominus,  
Tu solus Altissimus, Jesu Christe, cum Sancto Spiritu  
In gloria Dei Patris. Amen.

## LENNADENN AN ABOSTOL

Eürus an hini a garo Doue  
Eus e holl galon hag e holl ene. (2<sup>o</sup>)

An den a blijio da Zoue hon Tad  
A zo diwallet ha diwallet mat.

En ti hag er park, en deiz hag en noz,  
Doue warnezhañ a skuilho bennozh.

Gantañ e bried hag e vugale  
O devo o lod e bennozh Doue.

Evel ur wezenn, dourer he gwrizioù,  
Dougen a ray frouezh, delioù ha bleunioù.

Mar deo pinvidik e ray vad d'ar paour,  
E zorn a vo prest bepred d'hen sikour.

## LENNADENN AN AVIEL

### CREDO III

Credo in unum Deum,

Patrem omnipotentem, factorem cæli et terræ, visibilium omnium  
et invisibilium.

Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum, et  
ex Patre natum ante omnia sæcula :

Deum de Deo, lumen de lumine, Deum verum de Deo vero.

Genitum, non factum, consubstantialem Patri; per quem omnia facta  
sunt.

Qui propter nos homines, et propter nostram salutem, descendit de  
cælis;

Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine, et homo  
factus est.

Crucifixus etiam pro nobis sub Pontio Pilato, passus et sepultus est.

Et resurrexit tertia die, secundum Scripturas, et ascendit in cælum;  
sedet ad dexteram Patris.

Et iterum venturus est cum gloria judicare vivos et mortuos; cujus  
regni non erit finis.

Et in Spiritum Sanctum, Dominum et vivificantem; qui ex Patre Filio-  
que procedit;

Qui cum Patre et Filio, simul adoratur et conglorificatur; qui locutus  
est per prophetas.


Et unam, sanctam, catholicam et apostolicam Ecclesiam.

Confiteor unum baptisma in remissionem peccatorum.

Et exspecto resurrectionem mortuorum, et vitam venturi sæculi.

Amen.

## PEDENN HOLLVEDEL



Ao-trou Dou-e ma-de-lezh-us, se-la-ouit hon fe-denn !

## SANCTUS : E LATIN

### GOUDE AR GORREOU

Me ho salud, Korf ma Salver  
'Zo diskennet war an Aoter :  
Ennoc'h ar bara zo chenchet,  
Ha ganeoc'h e vezin maget.

Me ho salud, o Gwad divin,  
'Zo er c'halir e-lec'h ar gwin :  
C'hwi evidon 'zo bet skuilhet,  
Deut d'amgwalc'hiñ a bep pec'hed.

## PATER NOSTER : KANET E LATIN.

**P**ater noster, qui es in cælis, sanctificetur nomen tuum, ad-  
veniat regnum tuum, fiat voluntas tua, sicut in cælo et in terra.  
Panem nostrum quotidianum da nobis hodie; et dimitte nobis  
debita nostra sicut et nos dimittimus debitoribus nostris; et ne  
nos inducas in tentationem; sed libera nos a malo.

## AGNUS DEI : KANET E LATIN

Agnus Dei qui tollis peccata mundi, miserere nobis.  
Agnus Dei qui tollis peccata mundi, miserere nobis.  
Agnus Dei qui tollis peccata mundi, dona nobis pacem.

## KOMUNION

Aeled eus ar Baradoz, sellet pebezh enor  
A ra dimp er Sakramant Jezuz hon Redemptor :  
Ur wech evit hon prenañ ec'h eo bet inkarnet,  
Hag evit dont d'hon magañ ganimp e chom bepred!

Mari, gwir Vamm da Jezuz, Mari, ma Mamm dener,  
Ma sikouret da resev ho Mab ha ma Salver;  
Me nen on siwazh netra, netra nemet pec'hed,  
Mes ennoc'h ec'h esperan, o ma Mamm benniget.

Krouer an Neñv, an douar, war an aoter bemdez,  
Dre gomz nerzhus ar beleg a ziskenn a-nevez :  
Un Doue kalz uheloc'h evit ar firmamant,  
En em izela dindan spesoù ar sakramant.



**Jezuz pegen bras ê !  
Plijadur an ene,  
Pa vev en gras Doue  
Hag en e garantez**

Berr kavan an amzer  
Hag ar poanioù dister,  
O soñjal deiz ha noz  
E gloar ar Baradoz.

Pa sellan en Neñvoù  
Etrezek ma gwir vro,  
Nijal di a garfen  
Evel ur goulmig wenn.

Gant joa e c'hortozan  
An termen diwezhañ;  
Hast am eus da welet  
Jezuz ma gwir bried.

Doriou ar Baradoz  
Digor ouzh ma gortoz  
Ar sent, ar santezed,  
War o zron azezet.

Me 'c'hello, evit mat,  
Gwelet Doue an Tad  
Gant e Vab eternal  
Hag ar Spered Santel

Pegen dous 'vo klevet  
Jezuz din o laret :  
« Deut, servijer fidel,  
« Deut d'ar c'hloar eternal. »

Eürusted hep he far,  
A-vremañ me ho kar,  
Ennoc'h 'dal ma sonjan  
Divec'h en em gavan.

## DA ECHUIN

**Nan eus ket en Breizh, nan eus ket unan,  
Nan eus ket ur Sant evel Sant Erwan. (2<sup>ur</sup>)**

N'eus ket en Argoad, na mui en Arvor,  
Koulz ha sant Erwan, 'vit an dud a vor.

Nan eus ket er vro, dre-holl e larer,  
Hag a ve ken mat 'vit al labourer.

N'eus ket kaeroc'h skouer d'an dud a lezenn,  
Evit Sant Erwan, skouer ar veleien.

Ha d'ar bevien gaezh, ha d'an dud a boan,  
Nan eus ket gwelloc'h evit sant Erwan.

Gant tud a bep stad, uhel hag izel,  
E peder Erwan a-dost hag a-bell.

'Vit an holl e oa leun a garantez,  
Evel gwir vreudeur o degemere.

Va Breudeur ha va C'hoarezed kristen,

deuet oc'h betek amañ evit enoriñ sant Erwan. Evurus on ivez o tont hiziv amañ da bediñ sant Erwan, ha lavarout a ran trugarez a-greiz-kalon d'an Aotrou Loeiz Guizioù, person ar Vinic'hi, person Sant Erwan, evel ma lavarer e Bro-Dreger, da vezañ roet tro din da lavarout an oferenn-mañ evidoc'h.

Kalz ac'hanoc'h a zo deuet eus pell, hag o tont etrezek ar Vinic'hi meur a hini ac'hanoc'h en deus kerzhet emichañs dre an hentoù bet darempredet ivez gant Sant Erwan, gwech all gozh, seizh-kant vloaz zo bremañ. Rak Sant Erwan a ~~veze~~<sup>veze</sup> kalz, war-droad alies, bepred ur sac'h-ler gantañ ouzh e gostez. Er sac'h-ler-se e oa dornskridoù eus ar Skritur-Sakr, testennoù eus an testamant kozh hag eus an testamant nevez, a lenne war vord an hent, pa felle dezhañ diskuizhañ e dreid ha sevel e spered etrezek an Aotrou Doue.

Sant Erwan eta en deus graet ouzhpenn daremprediñ hon hentoù douarel : darempredet en deus ivez hentoù meur ar spered. Evit kompren e vuhez n'eo ket a-walc'h neuze gouzout resis dre beseurt hentoù eo tremenet, met ret eo ivez kompren pere eo bet e veajoù speredel.

Beaj speredel kentañ Sant Erwan a zo bet ur veaj etrezek an deskadurezh uhel. C'hoant gantañ da gaout un deskamant uhel, Sant Erwan a guita ar Vinic'hi hag e vro er bloavezh 1267, evit mont etrezek Paris. D'ar c'houlz-se ne oa ket en hon bro, e Breizh, skolioù uhel war ar skiantoù relijiel, ha ret mat e oa neuze kuitaat, mont e-pad bloavezhioù d'ar skolioù-meur brudet d'ar c'houlz-se, evel hini Paris. Dek vloaz e chomo Sant Erwan du-hont, o ouestlañ e holl amzer d'ar studioù. Dont a raio da vezañ Mestr-war-an-Arzoù, evel ma veze lavaret neuze, ha Doktor war an Deologiezh. Met evit Sant Erwan n'eo ket a-walc'h, hag e 1277 e kuita Paris evit Orleañs : fellout a ra dezhañ studiañ ar gwir, da lavarout eo lezennoù an Iliz ha lezennoù ar stad. Goude daou vloaz studi en Orleañs, e tevio Sant Erwan da vezañ Doktor war lezennoù an Iliz, ha Doktor ur wech ouzhpenn war lezennoù ar stad, pe ar vuhez sivil.

Gant an deskamant uhel-se e c'hell Sant Erwan bezañ barner pe alvokad. Distreiñ a raio neuze da Roazhon er bloaz 1280, evit bezañ

ofisial. Met neuze adarre e kendalc'ho gant e studioù : E ti ar Gordellidi e studio dreist-holl ar Skritur-Sakr ha Tadoù an Iliz.

Hir eo bet beaj Sant Erwan etrezek an deskadurezh uhel, met gellout a reomp lavarout e oa Sant Erwan e-touez an dud ar muiañ desket en e amzer.

Met Sant Erwan a oa ouzhpenn un den desket bras : un den a galon a oa ivez. Adal an distro d'e vro, e Roazhon, e welomp Sant Erwan o kregiñ gant ur veaj-all, ar veaj etrezek tud paour e vro. Ur veaj diaes ivez hag he deus koustet kalz da Sant Erwan. Hemañ a oa eus un tiegezh a renk uhel, eus noblañsoù kozh ar vro, ha madoù en doa. Diaesoc'h a-se eo bet dezhañ dilezel an enorioù, ar gwiskamantoù pinvidik, evit kemer renk ha dilhad ar re baour. E zilhad kaer, e arc'hant, ha memez e votoù-ler, Sant Erwan a roio pep tra, evit kemer skouer war hon Salver Jezuz Krist, ha dre garantez evit an dud paour. Ar re-mañ a leunio e di, er Vinic'hi, bepred lojet ha maget gant an den santel. Evit echuiñ e zistro etrezek tud paour e vro, Sant Erwan a asanto c'hoazh bezañ beleg ha person e parrezioù bihan a Vro-Dreger, e parrez Tredrez e 1284, hag e parrez Louaneg er bloaz 1292.

Koulskoude, an deskadurezh uhel hag ar garantez evit poblañs e vro n'int ket a-walc'h evit Sant Erwan.

Adalek e amzer e Roazhon e krogo c'hoazh Sant Erwan gant ur veaj speredel all, ar veaj etrezek ar velegiezh hag ar santelezh. Fellout a raio dezhañ kemer ar groaz war e chouk, ha setu perak ec'h asanto bezañ beleget. Lakaat a raio neuze an holl dud souezhet gant e binijennoù : yun a raio alies, kousket e-kichen e vele, war ar c'haled, ha tremen ul lodenn eus e amzer o pediñ.

O vont eus an eil parrez d'eben, Sant Erwan a lavare an oferenn er chapelioù pe en ilizoù a gave war e hent. Met prezeg a rae ivez d'an dud, e-pad eurvezhioù penn da benn, hag an dud a chome d'e selaou. Moarvat tud an amzer-se n'o doa ket kalz muioc'h a basiañted eget an dud a-vremañ, met Sant Erwan a ouie komz dezho en un doare plijus ha don diwar-benn ar feiz hag ar relijion.

Echuiñ a ra an <sup>de</sup>tre beaj-se etrezek ar santelezh gant testamant Sant Erwan, hag e varo. Fellet eo bet dezhañ reiñ pep tra d'ar re baour, evit mervel paour e-unan. An 19 a viz Mae 1303 ec'h echuo evit mat, beajoù Sant Erwan war an douar-mañ, ar beajoù etrezek an deskadurezh uhel, etrezek tud paour e vro, hag etrezek ar santelezh.

E ene avat a grogo neuze gant ur veaj-all, pell diouzh poanioù ar bed-mañ, etrezek evurusted ar baradoz.

Va Breudeur ha va C'hoarezed kristen, peseurt kentelioù a c'hellomp-ni tennañ eus beajoù speredel Sant Erwan ? D'am soñj hon eus teir gentel da dennañ :

Da gentañ e tleomp klask anavezout gwelloc'h ivez gwirionezioù ar feiz, klask kaout un deskadurezh uhel, evel ma lavar dimp testennoù Eil Sened-Meur ar Vatikan, hag evel ma kendalc'h hon Tad Santel ar Pab Yann-Baol II da c'houlenn en e brezegenoù. Evit-se eo ret alies asantiñ kuitaat ar vro, evit ur pennad-amzer d'an nebeutañ, rak n'eus ket siwazh a skolioù uhel e Breizh diwar-benn ar skiantoù a Iliz. Goulennomp neuze digant Sant Erwan ma 'c'h adsavo pe ma kresko an deskadurezh uhel e Breizh, hag evit pephini ac'hanomp.

D'an eil e tleomp ivez, evel Sant Erwan, mont etrezek ar re a zo ar muiañ dilezet er mare-mañ, ar vrezhonegerion, nac'het outo alies c'hoazh pep renk a-zoare er gevredigezh. Ar Pab Yann-Baol II a ro alies skouer e vro, Polonia, he deus dalc'het hag a zo padet a-dreuz d'an trubuilhoù ar gwashañ, n'eo ket o 'n em harpañ war an nerzhioù fizikel pe danvezel, met o 'n em harpañ war he sevenadur, he c'hultur, ar yezh hag an istor ha teñzorioù an arzoù-kaer. Sant Erwan a c'hell hor skoazellañ ivez eta, pephini ac'hanomp, ma komprenimp gwelloc'h talvoudegezh traoù ar spered.

Un trede kentel hon eus da dennañ eus beajoù speredel Sant Erwan : talvoudegezh ar velegiezh hag ar santelezh. Gwelout a reomp niver ar veleion o koazhañ, ha kalz parrezioù o chom bremañ hep ur person war ar plas. Neuze eo d'ar gristenion o-unan, d'al laiked, da gemer war o chouk ul lodenn ivez eus al labour-kristenaat, dre ober katekiz pa c'hellont, dre sevel bodadoù-pediñ kenetrezo, dre harpañ gwelloc'h ar re yaouank en o feiz. Met ivez, ret eo adarre hentañ ha stummañ ar re a fello dezho kemer evel gwechall hent ar velegiezh hag ar santelezh.

Neuze, o veajiñ dre hentoù ar vro, e soñjomp emamp o kerzhout war un douar santel, peogwir eo bet darempredet gant ar sent kozh evel-just, met war un douar santel ivez, peogwir tud an amzer-mañ a zo bepred tud a feiz hag a galon.

Amen.

PARDON SANT ERWAN : PEDENN AR FIDELED

Evit hor Mamm Santel an Iliz,  
ma vo miret e peoc'h hag e santelezh dre ar bed a-bezh,  
pedomp an Aotrou Doue ...

- Aotrou Doue madelezhus, selaouit hon fedenn.

Evit hon Tad Santel ar Pab,  
evit an eskibien hag ar veleion,  
hag evit pobl diniver ar gristenion, *ma chomint bepred unvan  
er feiz hag er garantez,*  
pedomp an Aotrou Doue ...

Evit an holl dud karget eus an deskadurezh,  
evit ar gelennerion hag ar skolidi,  
ma vo sklerijennet o speredoù gant donezonoù ar Spered Santel,  
pedomp an Aotrou Doue ...

Evit an holl Vrezhoned er boan, <sup>a zo</sup> ~~hag~~ er glac'har, *pe er prison,*  
evit an dud divroet pe hep labour,  
ma vo rentet dezho justis dre sikour Sant Erwan,  
pedomp an Aotrou Doue ...

Evit an dud yaouank a glask un uhelvennad d'o buhez,  
ma vo kalz anezho o kemer evel Sant Erwan,  
hent ar velegiezh hag ar santelezh,  
pedomp an Aotrou Doue ...

Evit an holl dud aet da anaon abaoe warlene,  
hag a zo bet e pirc'hirinaj er Vinic'hi,  
ma vint degemeret er baradoz, e-touez ar sent hag an aëlez,  
pedomp an Aotrou Doue ...

Aotrou Jezuz Krist,  
C'hwi hag en em zalc'h e-touez ar gristenion bodet en hoc'h anv,  
selaouit pedennoù ho tud fidel,  
ha dre hanterouriezh Sant ERwan, respontit bremañ d'o goulennoù,  
C'hwi a vev hag a ren a holl viskoazh da virviken. Amen.

PEDENN HOLLVEDEL



Ao-trou Dou-e ma-de-lezh-us, se-la-ouit hon fe-denn !

AMZERIADUR BUHEZ SANT ERWAN

hervez Arthur de la Borderie.

- 1253. Ganedigezh Sant Erwan.
- 1267. Mont a ra da studiañ da Skolveur Baris.
- 1277-1279. Studiañ a ra ar gwir en Orleañs.
- 1280. Distro Sant Erwan e Breizh goude e studioù.
- 1280-1284. Chomadur Sant Erwan e Roazhon evel ofisial an arc'hdiagon Maoris.
- 1281. Heuliañ a ra kelennadurezh ~~ar~~ Kordellidi Roazhon ha lakaat a ra en e spered, evit ar wech kentañ, ren ur vuhez penedel (pe : a binijenn).
- 1284. Kuitaat a ra Roazhon, ha dont a ra da vezañ ofisial eskob Landreger, ha war-un-dro beleg ha person Tredrez.
- 1290. Kregiñ a ra gant e brezegenoù.
- 1291. Kemer a ra e wiskamant burell gwenn ha pleustriñ a ra war embregoù uhel ar benedouriezh.
- 1292. Kuitaat a ra parrez Tredrez evit hini Louaneg, ~~adit~~  
~~adit~~ a zalc'ho betek e varv.
- 1293. Diazezañ a ra chapel Itron Varia Kervarzhin, hiziv Sant-Erwan Ar Vinic'hi.
- 1297. Diogelaat ha klokaat a ra an diazezadur-se.
- 1298-1300 Dilezel a ra e gargoù evel ofisial eskob Landreger.
- 19 a viz Mae 1303. Marv Sant Erwan.



SANT ERWAN.

PREFAS

An Aotrou Doue ganeoc'h. R/ Ha gant ho spered.

Savomp hor c'halonoù. R/ Troet int war-zu Doue.

Lavaromp bennozh d'an Aotrou hon Doue. R/ Just ha santel eo.

E gwirionez, Tad santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel,  
un dra just ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer,  
/ dre Jezuz Krist, hor Salver.

C'hwi hag a vez meulet gant ar Sent bodet en-dro deoc'h,  
/ rak pa roit gloar d'o meritoù, ez eo war ho tonezonoù e lakit ar gurunenn.

C'hwi hag a ro dimp dre o buhez ur skouer da heuliañ,  
dre hon unvaniezh ganto un eurvad da dañva,  
/ gant o fedenn evidomp, ur sikour d'hor skoazellañ.

Ha ni kennerzhet gant testoù ken niverus,  
ra vimp evit derc'hel start e stourm ar vuhez,  
/ hag evit gounit evelto, ar gurunenn na zivleunio biken.

Dre Jezuz Krist hon Aotrou, a ro dimp gant e wad,  
/ dor-digor, da rouantelezh ar Baradoz.

Drezañ, Tad santel, ez oc'h meulet gant an Aeled,  
enoret gant an Arc'haeled,  
adoret gant holl speredoù galloudus an neñvoù,  
/ a stou dirazoc'h, er vrasañ levenez.

Ganto eta hol lezit da sevel hor mouezhioù,  
/ evit ho pennigañ, ha kanañ d'ho kloar pep meuleudi :

Santel, santel, santel, an Aotrou Doue mestr ar bed !

Leun eo gant ho kloar an neñv hag an douar :

Hozanna e barr an Neñvoù !

Ra vo benniget an hini a zeu en ano Doue :

Hozanna e barr an neñvoù !

Sant Erwan

Antifonenn evit ar Gomunion

Roit hag e vo roet deoc'h; ur muzuliad kaer, hejet-mat ha leun-barr a vo skuilhet deoc'h e pleg ho mantell.

KEMPEDENN GOUDE KOMUNIAN

An Aotrou Doue ganeoc'h R/ Ha gant ho Spered.

Pedomp : Hor maget hoc'h eus, Aotrou Doue, gant sakramant ar silvidigezh; plijet ganeoc'h da veritoù ha pedennoù Sant Erwan, hol lakaat er stad da resev e pep amzer ho madelezhou. Dre Jezuz Krist ho Mab hag hon Aotrou, a vev hag a ren, Doue ganeoc'h ha gant ar Spered Glan, a holl viskoazh da virviken. R/ Amen.

An Aotrou Doue ganeoc'h; R/ Ha gant ho spered.

Bennigadenn : Doue hollc'halloudek d'ho pennigo, an Tad, ar Mab, hag ar Spered Santel. R/ Amen.

It e peoc'h hor Salver. R/ Bennozh da Zoue.

oooooooo

ABADENN F.R.3 - BREST (France-Inter M.F.)

AR GWENER 21 A VIZ MAE 1982 (12h20)

423 m. pe 93 MHz

DIWAR-BENN PARDON SANT ERWAN GANT AN AOTROU IVO LORSCHTEITER.

Frañch BROUDIG : An amzer.

Muzik

F.B. Ar c'heleier. Arc'heskob ar Brazil, an Aotrou Lorscheiter, a oa dec'h e Landreger evel pardoner da geñver pardon bras Sant Erwan. Bremaik ~~an Aotrou~~ ~~Landreger~~ am bo tro da c'hervel diwar-se an Aotrou Dubourg hag a zo person e Plufur, e Bro-Dreger, da glevout digantañ peseurt talvoudegezh o deus ar c'homzoù hag a zo bet distaget gant an Aotrou 'n Eskob Lorscheiter e Landreger dec'h. ...

Diouzhtu war-lerc'h an abadenn muzik e c'halvin neuze an Aotrou Dubourg, person Plufur, da gomz gantañ eus pardon Sant Erwan e Landreger.

Muzik

F.B. Allo, an Aotrou Dubourg ?

G.D. Ya !

F.B. Amañ Frañch Broudig. C'hoant am bije da glevout diganeoc'h 'ta neuze, peogwir eo deuet Arc'heskob ar Brazil, an Aotrou Lorscheiter, da Landreger, evit bezañ pardoner bras Sant Erwan, perak e oa bet pedet da zont da Sant Erwan.

G.D. Perak eo deuet da Landreger ?

F.B. Ya !

G.D. Meur a abeg a zo evel-just.

Da gentañ, e anv-bihan a zo Ivo, da lavarout eo Erwan, er yezh portugalek, ha neuze en deus klasket ivez gouzout muioc'h diwar-benn e sant-paeron moarvat. Setu ar pezh a soñjan d'an nebeutañ.

F.B. Ya ! Ha goude-se ez eus bretoned hag a zo er prizon en e vro !

G.D. Ya ! Met ouzhpenn-se d'am soñj ez eus un abeg all ivez : e sekretour a zo an Tad Pouliken eus Gwengamp, hag a zo misioner abaoe pell er Brazil. Henezh a zo eta sekretour bodadeg an eskibion er Brazil. Ha neuze ez anavez mat an Aotrou Lorscheiter, setu perak ivez eo bet aesoc'h dezhañ dont.

Abegoù all a zo c'hoazh : pedet eo bet ivez gant eskob Sant Brieg evit dont da ober ar pardon-se.

Ha neuze evel-just, dreist-holl, ez eus ivez beleion du-hont hag a zo en toull-bac'h : daou veleg, an Tad <sup>Gou</sup> ~~War~~ ~~ariou~~ hag an Tad Kamio, hag a zo bretoned. Int a zo er prizon er Brazil un tamm evel ma 'z eus bet beleion eus Breizh er prizon un toullad bloavezhioù zo, evit difenn ar justis.

Ouzhpenn, Sant Erwan ivez a zo anavezet bremañ kalz er Brazil.

Warlene e oa deuet Prezidant al Lez-varn Engalv eus Sao-Paulo, an Dr. Nelson Pinheiro Franco, da bardon Sant Erwan. Ha neuze~~n~~ sevel a reer ivez bremañ par-rezioù er Brazil dindan baeroniezh Sant Erwan.

Ouzhpenn, d'am soñj, ez eus un dra all en deus lakaet brudañ Sant Erwan er Brazil, eo ul levr a zo bet skrivet daou vloaz zo gant an Dr. Joao Gualberto de Oliveira diwar-benn Sant Erwan; da lavarout eo, buhez Sant Erwan er yezh portugalek a zo komzet er Brazil a-bezh, dre vras.

Setu an abegoù a zo bet evit lakaat an Aotrou Lorscheiter da zont, d'am soñj. F.B. Ya ! Peseurt talvoudegezh a c'hell kaout ar c'homzoù en deus distaget an Aotrou ~~Nelson Franco~~ Arc'heskob ar Brazil e Landreger, ha peseurt heklev a c'hell kaout ar c'havadenn-se en deus graet d'an dud da sikour ar beorion d'en em lakaat war-sav ?

G.D. Ya ! Da gentañ, an Aotrou Lorscheiter en deus lavaret un toullad gerioù eve just o lavarout e oa an daou veleg vreizhat a zo du-hont en toull-bac'h, met e choment sioul ha dispont evel ma ra ar vretoned peurliesañ.

Met lavaret en deus ivez he deus Breizh ur roll da c'hoari evit difenn ar justis, evit difenn ar re baour. Ha neuze en deus echuet o lavarout "Ra vezo pep-hini ac'hanomp un abostol a justis etre an dud hag ar broioù".

Ha d'am soñj e c'hell Sant Erwan bezañ ul liamm etre Breizh hag ur bern brocioù-all, peogwir eo anavezet bremañ kalz e broioù evel Bro-Flandrez da skouer. en Italia ha Roma e-lec'h ma vez graet ivez bep bloaz pardon Sant Erwan bremañ adarre; er Stadoù-Unanet ivez, peogwir e teu alvokidi eus du-hont; met e Breizh ivez e c'hell gouel Sant Erwan, ha dreist-holl beaj an Aotrou Lorscheiter, kaout heklevioù.

Da skouer e oa deuet ivez strolladoù studierion eus skolioù-meur, eus Aix-en-Provence da skouer, eus Paris, eus Nanterre, hag ivez evel-just eus Breizh, Brest Roazhon hag an Naoned, da bediñ Sant Erwan. Da lavarout eo e sav bremañ adarre er skolioù-meur strolladoù studierion hag en em laka dindan baeroniezh, dindan warez Sant Erwan.

F.B. Setu Sant Erwan a zo bepred neuze ur skouer evit an dud a hiziv ?

G.D. Ya! ur skouer eo sur-mat evit tud ar skolioù-meur, peogwir en doa darempredet kalz ar skolioù-meur, e oa un den desket-tre - me gav din en doa tri doktorad ha diplomaù all c'hoazh eus ar mare~~se~~ - hag ivez peogwir eo bet ur skouer evit ar studierion.

F.B. Ac'hanta, trugarez d'an Aotrou Dubourg. Ar pezh a c'hellan lavarout ouzhpenn war-lerc'h an dra-se, n'eo ket echu e droiad gant an Aotrou 'n Eskob Lorscheiter dre Vreizh, peogwir en deus da vont da welout familhoù an daou visioner hag a zo er prizon betek-henn. Er Faoued en deus da vont da welout unan eus ar familhoù, hag e Landerne da welout eben. Hag ouzhpenn-se e raio ivez prezegennoù en devezhioù-mañ e div ger eus ar vro.

Plufur, le 29 Avril 1982

Monsieur l'Abbé Yves THOMAS  
Curé-Doyen  
22220 TREGUIER.

Cher Monsieur le Curé,

je vous envoie donc le début du texte de la messe en breton. S'il vous en faut davantage, je reste toujours à votre disposition.

Je reviens également sur l'idée d'une association des amis de Saint Yves. Depuis quelques années j'ai essayé de réunir une petite documentation sur Saint Yves, et je m'aperçois que le sujet est extrêmement vaste. Saint Yves a eu et a toujours un rayonnement très grand dans de nombreux pays.

Il faudrait bien sûr réunir une documentation la plus large possible sur Saint Yves, sa vie, son culte, les multiples associations de juristes sous le patronage de Saint Yves, les publications etc ...

Une association des amis de Saint Yves intéresserait plusieurs catégories de personnes : les prêtres, les hommes de loi et aussi les étudiants qui en ont bien besoin.. Pour tous ceux-ci, Saint Yves reste un exemple admirable. A mon avis, le premier travail à faire serait un travail de secrétariat, afin de publier une petite revue ou une simple circulaire périodique traduite en plusieurs langues. Ceci permettrait de créer un lien entre toutes les personnes intéressées par Saint Yves. Si vous acceptiez de prendre la tête de cette association, je pourrais me charger du travail de secrétariat, du moins pendant quelque temps. Je pense que d'autres bonnes volontés viendraient ensuite nous aider. J'ai la chance de n'être pas trop débordé par le travail comme je l'étais à Guingamp, pour pouvoir consacrer un ~~temps~~<sup>peu</sup> de temps à l'extension du culte de Saint Yves.

Je vous prie d'agréer, cher Monsieur le Curé, l'expression de mes sentiments respectueux.

Abbé G. DUBOURG  
Recteur de PLUFUR  
22310 PLESTIN LES GREVES

*gant va quellan gour'hemennai*

*G. Dubourg*

( POUR LA PAGE PUBLICITAIRE DE SAMEDI )

TREGUIER

PLUSIEURS EVEQUES ET DIGNITAIRES ECCLESIASTIQUES  
DE NOMBREUX AVOCATS ET HOMMES DE LOI . UNE FOULE DE PELERINS .  
HONORERONT DEMAIN A TREGUIER . SAINT YVES PREMIER  
PATRON DE LA BRETAGNE ET MODELE DES JURISTES.

Le Docteur NELSON PINHEIRO FRANCO  
Président de la Cour d' Appel de Sao-Paulo  
représentera les hommes de loi du Bresil

Dans son remarquable ouvrage "HISTOIRE DE SAINT YVES PATRON DES GENS DE JUSTICE " édité il y plus d'un siècle , Maître Sigismond ROPARTZ, éminent avocat et pere du célèbre compositeur GUY ROPARTZ, raconte, en citant les ~~témoignages~~ dépositions des témoins du procès de canonisation de la mort de DOM YVES HELOURY DE KERMARTIN avocat des pauvres et défenseur des orphelins et Saint patron de la Bretagne

" C'était le 19<sup>eme</sup> jour de mai, un dimanche, de l'année 1303  
" aux premières lueurs de l'aube il parut s'endormir, il était mort  
" ON ne vit point sur ses lèvres , à ses narines , dans ses yeux  
" les traces abjectes de ~~l'agonie~~ des luttes de l'agonie et ces  
" signes affreux que la mort appose comme son sceau sur le front de  
" hommes . Son visage pâle et amaigri parut illuminé d'un doux sou-  
" rire, plus beau et plus rose qu'il n'était durant sa vie. Ses  
" funérailles furent un triomphe . La cathédrale de TREGUIER revenc  
" qua ces saintes dépouilles. Les prêtres portèrent sur leurs épau-  
" les le corps encore recouvert de ses pauvres ~~habilleme~~ vêtements  
" sans prendre le temps de le mettre au cercueil. Une foule innom-  
" brable portant des torches et des cierges accompagnait le convoi  
" et, a chaque pas , il fallait que les porteurs fissent halte  
" pour laisser le peuple baiser les mains du mort . "

CHAQUE ANNEE LE DIX NEUF MAI .

C'est l'anniversaire de ce 19<sup>eme</sup> jour de mai 1303 que l'on com-  
more en grande liesse chaque année . Depuis le début de ce quatorzi-  
siede TREGUIER et la BRETAGNE tout entière n'ont jamais manqué de  
témoigner leur reconnaissance à ce trégorrois qui fut , toujours se-  
lon les témoins de son temps , " l'un des plus étonnants modes  
de la Charité spontanée et dévouée , donnant tout ce qu'elle a et  
se donnant elle-même."

Les mérites d'Yves de KERMARTIN , prêtre et juriste , éclatèrent  
au grand jour . Au terme d'un procès qui fut instruit en AVIGNON  
et qui dura de 1331 à 1347 , le pape Clement VI notifia à PHILIPPE  
DE VALOIS Roi de France la canonisation du Saint Confesseur Yves,  
jadis prêtre du diocèse de TREGUIER : " de l'avis de nos frères  
nous l'avons canonisé et avons ordonné qu'il sera inscrit au catalog  
des saints et que sa fête sera célébrée chaque année le 19<sup>me</sup> mai du mo-  
de mai."

Le culte de SAINT YVES ne tarda pas a devenir populaire en  
France , en Europe et dans le Monde .

L'EGLISE DE SAINT YVES DES BRETONS A ROME.

La Ville Eternelle eut son église " St YVES DES BRETONS " .  
Construite en 1455 elle était située non loin de celle de SAINT  
LOUIS des FRANCAIS et à quelques centaines de mètres à peine du  
Vatican.

Auprès de l'église, un "hospice SAINT YVES" bénéficiait d'une rente de 7.000 écus romains . La confrérie bretonne, importante à ROME, restaura l'édifice en 1568 . Le culte y fut régulièrement célébré jusqu'en 1875. Les crédits pour l'entretien de l'église vinrent à manquer et le gouvernement de VICTOR-EMMANUEL signifia à la congrégation française qu'elle eut à restaurer l'église ou l'abandonner. Les fonds faisant défaut la démolition de ~~l'église~~ St YVES DES BRETONS fut décidée . Cette nouvelle provoqua dans la presse romaine d'énergiques protestations . Les bretons eux aussi déplorent aujourd'hui la disparition de cette fondation - trait d'union entre notre province et la Cité de Pierre - que l'on devait à un Finistérien Cardinal d'AVIGNON : Alain DE COETIVY . Il naquit le huit novembre 1407 au Château de Lestremeur en PLOUENEVANTER, Paroisse du diocèse de Leon .

### LE CULTE DE L'AVOCAT DES PAUVRES DANS LE MONDE .

Dans toute la France d'abord, dans divers pays d'Europe et du Monde ensuite , le Culte de SAINT Yves devint extrêmement populaire. On fonda de nombreux couvents et hôpitaux sous son vocable . Il fut honoré à RENNES capitale de la Bretagne , à Paris ensuite . Puis ce furent de nombreuses grandes villes de province : CHARTRES , ORLÉANS , DIJON , PAU , ~~XXXXXX~~ EVREUX , AUXERRE NOYONS et à l'étranger ANVERS , MALINES , GAND , LOUVAIN , AUGSBOURG , FRIBOURG , WITENBERG , COLOGNE , BUDAPEST , ROME , MILAN , NAPLES qui honorèrent régulièrement SAINT YVES , fondant des confréries et des Universités placées sous sa protection .

De grands Maîtres de la peinture tels RUBENS , JORDAENS , LE SODOMA , TRIGA s'emparèrent de son effigie .

Du quatorzième siècle à nos jours le culte du Saint Breton n'a cessé de gagner en popularité et en notoriété.

On se souvient encore dans la cité épiscopale des Grandes manifestations de 1936 qui virent les avocats américains avec à leur tête Mr SOUTHARD Consul général des U.S.A. offrir un vitrail à la Chapelle du Duc ; Du grand Pardon de 1937 avec l'hommage des barreaux Belges et Français scellé de nouveau par l'offrande d'un vitrail pour chacune des délégations .

En 1947 ce fut le sixième centenaire de la canonisation qui se déroula en présence de Monseigneur EUGENIO RONCALLI le futur JEAN XXIII . En 1953 TREGUIER fêta le septième centenaire de la naissance de l'humble fils de KERMARTIN .

Les plus hauts dignitaires de l'Eglise sont venus présider le Grand Pardon, notamment les cardinaux FELTIN , GERLIER , LIENART , ROQUES , RICHAUD , Monseigneur MARELLA Nonce Apostolique .

### LE DOCTEUR NELSON PINHEIRO FRANCO DE SAO-PAULO

Des délégations d'avocats , juristes et universitaires sont fidèles chaque année à leur Grand Patron . Demain , pour la première fois les Hommes de Loi du BRÉSIL seront représentés par une très haute personnalité ; Le docteur NELSON PINHEIRO FRANCO Président de la Cour d'Appel de SAO-PAULO et l'un des promoteurs , avec GUY-MARIE DUVAL , du culte de SAINT YVES en Amérique du Sud.

SAO-PAULO aura dans quelques mois son église SAINT YVES. Elle sera située dans l'un des quartiers neufs de la Grande ville brésilienne . Une biographie du Saint breton vient d'être publiée

en langue brésilienne ( Portuguais ) par le Docteur JOAO  
GUALBERTO DE OLIVEIRA de l'Institut des Avocats de SAO-PAULO.

Cette année le Pardon a lieu un dimanche . Il est  
probable de ce fait, qu'il va connaître un extraordinaire succès  
populaire . Six CENT soixante ans après la mort du thaumaturge,  
des Bretons qui viendront des coins les plus reculés de la provin  
ce clameront une fois de plus de tout leur coeur " NA NEUS KET  
EN BREIZ , NA NEUS KET UNAN , NA NEUS KET ER ZANT EVEL ZANT  
ERWAN " .

Yves MOREAU

---